



## DEVOSION

DA

# GALON SACR JESUS.

## AR SIZUN SANTELEET.

### Ar Sul.

**SONJOMP ERVAD.** An devosion d'ar Galon Sacr a zo savet evit honori Calon divin hor Zalver hag ar garantez ep termen en deuz he lakeat da rei he vuez evidomp. Ar pezh a glasker da ober eo renta dezhan carantez evit carantez, he drugarecat euz he vadoberou, hag he zic'haoui euz an dismegansou a rer dezhan dalc'h mad, dreist oll e Sacramant an Aoter. Jesus-Christ he unan en deus roet da anaout an devosion-ma evel an doare ar guella evit dihuna etouez ar gristenien ar feiz a venn mouga hag ar

garantez a ia var ienaat. N'eus devosion ebet hag a ve kement dioc'h doare izomou an dud brema. Eleac'h ar garantez-ze o deuz an dud evitho ho unan, eleac'h an ioul-ze d'ar plijadurezou, eleac'h an diegi da hevilla ar relijion, eleac'h ar c'hoant-ze o deuz an dud da gaout danvez, ar pez a zisparti ar c'halonou hag a lam digantho an ners da ober ar mad, an devosion-ma hon laca da henori ha da adori ar Galon Sacr-ze, an hini a gar muia an dud, a zo ar glanna, an tenera, an hini en deus muia truez ouzomp.

**PEDOMP.** O Jesus, va esperans guirion, grit ma teui ho Calon, bet toullet dre garantez evidomp, ha digor evit an oll bec'herien, da veza evit va ene eur c'hre eleac'h ma c'hello en em denna ep aoun ebet. *(Santez Gertrud.)*

**PETRA RAIMP BREMA.** En em roit calonek da zervicha hor Zalver, evit henori ar prez e deus bet he Galon Sacr da henori he Dad eternal.

**SAVOMP HOR SPERET VARZU AN ENV.** O Mari, grit mac'h anavezimp Calon Sacr Jesus.

**PETRA A RAIMP DIVEZATOC'H.** Me lacai va hano e Breuriez Calon Sacr Jesus; me gommunio bep guener kenta ar miz. En deiz-ze, e livirin ar beden dre behini oun en em vouestlet da Galon Sacr Jesus, hag e rin dezhan *Amand henorabl.*

### Billun.

**SONJOMP ERVAD.** An devosion da Galon Sacr Jesus ne deo ket savet evit eun ene devot bennag epken. Hor Zalver en deus roet da c'houzout e felle dezhan e vije roet da anaout ha skignet e pep leac'h. Ha n'en deuz-hen ket eur garantez tener evit an *oll* dud? Ha n'en deuz-hen ket skuillet he c'hoad evit an *oll*, hag ho c'harget euz he vadoberou? Ha n'o deuz-hi ket *oll* gouliet ar Galon Sacr-ze dre ho fec'hejou? Calon Jesus eo tenzor an *oll* dud; evit an *OLL* eo bet digoret var ar groaz, hag an *oll*, zoken ar re o deus great ar muia pec'hejou, o deuz perz en he drugarez hag en he garantez. Eun dever eo eta evit an *oll* dic'haoui Calon Jesus dre ho anaoudegez vad hag ho c'harantez; guir o deuz an *oll* da glask er Galon Sacr-ze repu ha frealzidigez. Evelse ar gristenien devot a zo bet laouen braz o clevet en doa gourc'hemenet Pii nao ma vije great gouel ar Galon Sacr dre an Iliz *oll*, ha ma vije laket iviziken e renq ar goueliou bras.

**PEDOMP.** O va Jesus, ne c'hoantan nemedoc'h, ha ne baouezin morse ken n'am bezo gallet en em guzet *oll* en ho Calon Sacr. (*Santez Catell a Sien.*)

**PETRA DA OBER BREMA.** Hirio grit ho callout evit beza dizroug hag hegarad e kenver ho nessa, evit henori an dousder hag an drugarez ep termen a Galon Jesus.

**PEDEN A GALON.** O Mari, grit deomp caret Calon Jesus, hag he gemeret evit skuer.

PETRA DA OBER DIVEZATOC'H. Bep bloaz e celebrin, devota ma c'hellin, gouel ar Galon Sacr; eun navet a rin evit en em bourchas d'ar gouel-ze. Bemdez e pedin evit ar bec'herien a zo bet kement caret gant Galon Jesus hag a zo ken diauaoudeg en he genver. Sonjal a rin aliez er c'homzou-ma euz al leanez santel Mac'harit-Mari. « Etouez an oll devozionou a ell caout an eneu santel, ne gaf ket din e ve nicun hag a ve goest da zantelaat eun ene e kerber amzer evel an devozion d'ar Galon Sacr. »

**Dimeurs.**

SONJOMP ERVAD. Evit gouzout pebez reng a dle da gaout devozion ar Galon Sacr er relijion catolik, eo avoalc'h sonjal eo hor Zalver he unan en deus goulennet ma vije savet ha skignet dre ar bed c'hristen; hen eo en deus merket ar pep brasa euz ar pezh zo da ober er Vreuriez, ha great en deuz ar promessaou caera d'ar re a iaje enhi. Lavaret en deuz, etouez traou all, e roje dezho ar c'hras da veva en unvaniez gant tud ho zi, da gaout plijadur o servicha Doue, da c'houzantv ho foaniou ep en em jala, ha da vervel ep aoun. « Me hen lavar, ep aoun da veza dislavaret, eme al leanez santel Mac'harit-Mari, ma c'houfet pegement e plij an devozion-ze da Jesus-Christ, christen ebet, daoust pe gen dister e ve he garantez evit hor Zalver, ne vancfe da vont er Vreuriez. — Hor Zalver a laca a gostez tenzoriou ep niver evit ar re a zavo hag a skigno an devozion-ma. — Hor Zalver en deus

diskuezet din hanoiou eun niver braz a dud a ioa  
scrifet en he Galon abalamour d'ar c'hoant o doa  
da lacat he garet hag he henori, hag abalamour  
da ze e chomint eno scrifet evit ato.

**PEDOMP.** Calon Jesus, feunteun a garantez, eienen  
a c'hrasou, mor a vadelezou, va list da vont e gouli  
ho Calon digor, evit ma root din ar pardon oc'h  
eus gounezet evidon var ar groas.

*(Al leanez santel Franseza ar Serafinet.)*

**PETRA DA OBER BREMA.** Pa viot tentet, pa goezet  
ha pa viot digalon, kinnigit da Zoue goad Jesus-  
Christ ha poaniou he Galon Sacr.

**PEDEN A GALON.** O Mari! hon lakit en ho kichen  
e Calon Sacr Jesus!

**PETRA RAIMP DIVEZATOC'H.** Bep bloaz e lakin  
miz Even da henori Calon Jesus, evel ma lacan  
miz Mae da henori ar Verc'hez. Evelse Mari a vezo  
an hent am c'haso da gaout Jesus.

### **Dimerc'her.**

**SONJOMP ERVAD.** Lavaret a eller d'ar gristenien  
ar pezh a lavare sant Ian-Vadezour d'ar Iuzevien,  
o comz a Jesus : « En ho creiz ez euz unan ha ne  
anavezit ket. » E guirionez, Jesus-Christ ne deo  
ket anavezet avoalc'h; ne zonzjer ket mad avoalc'h  
petra eo he garantez. Gouzout a rer, evit guir, ez  
eo Doue, ez eo maro evidomp, ema e Sacramant an  
Aoter; n'hen anavezer ket avad evel mac'h anavez  
eur bugel he dad mad, evel mac'h anavezeur mignon  
he vignon calonek; en eur ger, n'hen anavezer ket

gant ar galon, dre an anaoudegez-ze a ro fizians da dostat outhan. Hogen an devosion d'ar Galon Sacr a rai deomp anaout ha caret Jesus, en eur dizelei deomp ar burzudou euz ho drugarez, hag o rei deomp da anaout muioc'h mui pegement e car ac'hanomp. « Mac'h anaveschac'h donezon Doue, a lavare hor Zalver d'ar Samaritanen! » Ah! ma c'houfemp petra en deus roet deomp Jesus en eur rei deomp he Galon... pebez carantez n'o pije-hu ket evithan! pebez fizians n'o pije-hu ket enban!

**PEDOMP.** « O gouli dudiuze a gostez Jesus, mar d'oun euz eo dreizoc'h; ho toudeser am zenn da vedoc'h, hag e fell din chom enhoc'h, ha lacat enhoc'h kement am euz ha kement a esperanç. »  
(*S. Fransez Borgia.*)

**PETRA DA OBER BREMA.** Evit henori vertuziou dispar Calon Jesus, labourit start d'en em dizober euz ho faziou.

**PEDEN A GALON.** O Mari, grit ma or beza eur fizians vraz e Calon Sacr Jesus.

**PETRA DA OBER DIVEZATOC'H.** Aliez e pedin Calon Jesus dare da vervel evit ar re en em gaf bemdez var ho zremenvan. Eun act a c'hlac'har am befe dezho dre va fedennou, a ell digeri an Euz dezho. Mar gelfen dont abenn da zavetei eun ene bemdez, pebez eost puil evit an eternitel sant Bonavantur a lavare, o comz a Jesus : « Me gomzo oc'h he Galon, hag am bezo digantha ar pez a garin. »

**Diziou.**

**SONJOMP ERVAD.** Calon Jesus a zo bet furmet evidomp e corf ar Verc'hez Vari; finvet en deus, pedet en deus, gouzanvet en deuz evit hor savetei; laket en deus scrifa an histor ker caer euz he Aviel; hen eo an eienen a c'hras a red er Zacramanchou. Evel ma tisk deomp an Tadou santel, ar Galon-ze e deus, dre he gouli burzuduz, laket da c'henel an Ilis benniget; euz an Tabernacl, eleac'h m'ema o chom, e teu d'he ren ha da rei ners dezhi. Ar Galon-ze eo a peb nerz, a zantela peb poan, a laca peb vertus da zevel en ene. Ar Galon-ze a ro deomp ar pardon er gador gofez, hag a gomz ouzomp, diabarz enhomp, dre ar c'hras. Ar Galon-ze eo e deus roet deomp Mari evit Mam, hag a zo, e Sacramant an Aoter, eun dudi eviti chom en hon touez. En eur ger, ar Galon-ze eo an eienen hag ar c'han dre bere e teu deomp oll grasou an Env. E guirionez, Doue, oc'h en em ober den, o veza kemeret eur galon henvel oc'h hon hini, evit skuilla varnomp dreizhi he garantez ep termen, en deus roet ive dre eno dezhi ar gark da skuilla varnomp pep madelez ha pep trugarez; hag evelse ne deuket eur c'hras, eur vad deomp a bers Doue nemet dre Galon Jesus.

**PEDOMP.** « O carantez! ô carantez dreist pep carantez a Galon Jesus, pelec'h ema ar galon hag a allo morse ho pennigen avoalc'h? Ra vevo ato ar Galon-ze en hor c'halonou! » (*S. Fransez a Zal.*)

**PETRA DA OBER BREMA.** Grit kement a reot en unvaniez gant Calon Jesus, evit dont abenn da renta eün oc'h *intansion*.

**PEDEN A GALON.** O Mari, grit ma carimp Calon Sacr Jesus evel ma her c'harit!

**PETRA DA OBER DIVEZATOC'H.** Kemeret a rin santimanchou Calon Jesus e kenver Mari, sant Joseph, an Ælez, ar Zænt, an enecou euz ar purgator. An devosion da Galon Sacr Jesus, eleac'h bianat va devosionou all, a vezo ar genta anezho hag a vago ar re all. « Lakit enhoc'h, eme sant Paul, ar zantimanchou en deus bet Jesus-Christ he unan. »

### **Dirguener.**

**SONJOMP ERVAD.** Hor Zalver en deus diskuezet ar c'hoant en doa da velet henori he garantez ep termen dindan skeuden he Galon gouliet ha mercou ar bassion en dro dezhi. Prometet en deuz e skuilje puil he vennoziou e kement leac'h ma vije ar skeuden pe an imach-ze. Ha petra a oufe Calon Jesus da ober eleac'h ma en em gaf nemet caret, pardoni, bennigen ha frealzi? (Consoli.) Imach ar Galon Sacr a brezeg didrous, mes kre hag eb ean; hon dougen a ra da garet ha da gaout fizianz en eun Doue en deus caret kement an dud. Setu daou c'hant vloas zo en deus roet Jesus da anaout ar c'hoant-ze euz he Galon, ha gouscoude nag a ilizou, nag a diez christen ha n'o deus ket c'hoaz imach



ar Galon Sacr ! Nag a dud clanv , a heorien , a eneuou ankeniet ha n'o deus ket dirag ho daoulagad imach ar c'henta skuer-ze a zentidigez oc'h bolontez Doue ! Oh ! nag a c'hrasou ne skuilfe ket ar Galon Sacr-ze , ma ve , epad miz Even , laket he imach , a vel d'an oll , en oll Ilizou , var eun aoter kempennet a zoare , evel var eun tron a drugarez , evit rei ac'hano digemer d'hor meuleudiou ha d'hor pedennou !

**PEDOMP.** O Jesus carantezus , chenchit va c'halon paour en ho Calon Sacr ; ra deui ho poanniou da lacat unvaniez etre ho Calon ha va hini , ha ra ho lacaint d'am c'haret ato ha da gaout ato truez ouzin. *(S. Alf. de Ligory.)*

**PETRA DA OBER BREMA.** Grit ho callout da zic'haoui Jesus euz al loskentez o deuz an dud e kenver Doue , en eur ober ho tevosionou c'hoeg ha kalonek.

**PEDOMP.** O Mari , hon rentit c'hoantek da lacat henori Calon Sacr Jesus.

**PETRA DA OBER DIVEZATOC'H.** Lacat a rin em zi eun imach a Galon Sacr Jesus , ha bep bloaz e lakin unan e tiez an dud paour. An aluzen a dremen , ar Galon Sacr avad a jomo ato e kichen an dud reuzeudik. An imach santel-ze a zigaso da zonch ema e guirionez Calon Jesus en tabernacl , hor c'har hag e ped evidomp.

### **Dissadorn.**

**SONJOMP ERVAD.** Sant Augustin a laca Calon Jesus e kem gant arc'h Noe; nicun euz ar re a ia enhi ne ra pense. Euz ar Galon digor-ze, eme sant Cyprian, e tilam an eienen a red beteg ar vuez eternal. Calon Jesus, eme sant Bernardin, eo ar fourniez an toma a dle lacat an tan er bed oll. Sant Per Damien a c'half ar Galon-ze an tenzor ep ment euz ar furnez hag euz ar skiant, sant Fransez a Zal her galf an eienen euz an oll grason, ha sant Bonavantur, an tenzor euz an oll vadou. Sant Fransez Assis, santez Clera, sant Lois Gonzag en em erbede dalc'h mad outhi, evel oc'h ar feunteun a garantez Doue. Erfin, ar Galon carantezus-ze a voue roet da zantez Mechtilda, evel eul leac'h distro epad he buez hag evel ar brasa frealzidigez a elle da gaout en heur ar maro.

**PEDOMP.** O Calon digor euz va Zalver! oh leac'h euruz a jom enhan an eneoù a gar Doue e guirionez! ah! plijet ganeoc'h rei c'hoas digemer d'am ene!

**PETRA DA OBER BREMA.** Kemerit skuer dioc'h an ioul e devoa Calon Jesus da zavetei an eneoù, ha deuit da veza abostol dre ar beden, dre ar skuer ha dre an aliou mad.

**PEDEN A GALON.** O Mari, ni ginnik deoc'h Calon Sacr Jesus. Kemerit-hen, ô Mam zantel, gant hini oc'h oll bugale pere a lavaro ato calonek : *Pep tra da Galon Jesus dre Galon dinam Mari.*

PETRA DA OBER DIVEZATOC'H. Diskuez a rin ar  
c'hoant am eus da lacat henori ar Galon Sacr, o  
rei imachou ha kenteliou evit diskuez penauz ho  
anaout hag he garet. Epad miz Even ha bep guener  
kenta ar miz e roin eun dra bennag evit sicour  
delc'her eul lamp, em ilis parrez, dirag imach ar  
Galon Sacr. Kementse a vezo ar merk euz va c'ha-  
rantez, an herrez euz va bolontez vad hag euz va  
anaoudegez e kenver Calon Jesus.



### **Pedennou da lavaret bemdez.**

---

EVIT OBER AMAND HENORABL HAG EN EM GONSACRI  
DA GALON JESUS.

O Calon Sacr eus va Jesus, petra ne ellan-ma  
glibia gant va daelou, ha goalc'hi gant va goad al  
lec'hioù ma roit deomp mercou euz ho carantez  
tener, hag e pere ne gavit nemet dismegans, dis-  
prich, pe tud ha ne zellont ket ouzoc'h. Evit ho  
tic'haoui a gement all a zismegansou, e kinnigan  
deoc'h carantez an oll eneoù mad a zo brema e  
buez hag a vevo divezatoc'h var an douar; carantez  
birvidig an ælez hag ar zent euz ar baradoz, ha  
dreist oll ar zantimanchoù tener euz ho Mam di-  
dach. O va Jesus carantezus, va list da ginnigen  
deoc'h ive, var eun dro, kement ioul vad, kement  
santimant a garantez a zo em c'halon.

EVIT GOULEN PEP TRA.

O Calon Jesus, skuillit ho pennoziou ar re builla var an Ilis santel hor mam, var hon tad santel ar Pab, var an hini zo e penn an Escopti-ma, ha var an oll dud a iliz. Grit ma kendalho er vad ar re a zo enha, ma tistroio ar bec'herien oc'h Doue; sclerait ar re zo en errol, bennigit hor c'herent hag hor mignonet, deut da gichen ar re zo var ho zremenvan; tennit euz ar purgator an eneou santel zo eno, ha lakit ho carantez da ren var ar Frans a zo consacret deoc'h.

PEDEN EVIT AR RE ZO VAR HO ZREMENVAN.

Calon Jesus, dare da vervel, o pet truez oc'h ar re zo var ho zremenvan.

O Jesus, meurbet trugarezus, c'hui pehini oc'h eus kement a garantez evit an eneou, me ho ped, dre ar boan e devoue ho Calon pa voac'h dare da vervel, ha dre boaniou ho Mam didach, goalc'hit en ho coad an oll bec'herien zo var an douar, a zo brema en ho zremenvan, hag a dle mervel hirio. Evelse bezet gret. (*Cant dervez Induljansou bevech ma vezo lavaret. PII NAO.*)

Permis d'imprimer.

Quimper, 21 Mars 1870.

JÉGOU, V. G.

---

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.

*Handwritten signature or initials*



**SAINT-PIERRE D'ARCADES MISSION.**

Et c'est adieu, Croix sainte, hor garras,  
 C'houi, hon tenor, tenor a garras,  
 C'houi a sale ho des en hor c'halon  
 Ar souj pen douc evens hor Mission.  
 E c'hars ho treid, oll arvan prosternet  
 Ni a gavo ners a contraij depret,  
 Evit tec'hel demeus an oll vignon  
 A chom fidel da guement a c'hrigon.  
 A pa deuyo ar bed gant he-bechou,  
 Da glap terti hon oll promessou,  
 Croaz Jesus, hac he Yam beniguet  
 Hon difenn eus hon enemi.  
 Ar vuez-man a so per ha bonnia,  
 Leun a zepen, ha siouas perillus,  
 Mil guesch erus an hini a laca  
 E Croaz Jesus he vonneht, he joa,  
 Couraij eta, dougouq dete'r maro,  
 Croaz Jesus, hac hy, sur, don dougoz  
 D'ar joa hep fin, ha c'hloar ar barados,  
 E leac'h ma raiamp gant Doue da repoz.

FIN